



Photo CHARROUIN, St-Pol-de-Léon

AR PLAC'H diez da gountanti

SON NEVEZ

1

Eur plac'hik yaouank euz a Leon
A doa pell-zo c'hoant dimezi
Mez great e doa tro ar c'hanton
Heb kaout eur goaz da blijout dezhi.

2

C'hoant a doa kaout araok fortuna
Eur paotrik fur, eur paotr a zoare,
Hag eun den mad d'ober forz petra,
Ar seurt-se vez ket kavet bemde.

3

Hag eun dervez eun den a feson
A deuz d'he goulen da zimezi
Skei a reaz eun taol en e galon
Kerkent a ma klevaz anezhi.

4

Araok ma kemerin-me eur goaz
E rankan rei va c'hondisionou,
Ma plijont d'id ez oun kountant braz
Pa gari da skriva 'n embannou.

5

Me a fell d'in kerkent eureujet
Kaout va dijuni e va gwele
Ha gant va goaz d'in digaset
Kafe leaz, dien wargoure.

6

Barz an ti me vezo ar vestrez
Bragou ha losten vezo ganen,
Bale eün a ranki aliez
Rag plega d'am goaz ne rin biken.

7

Labourat a ri war 'dro an ti
Goro ar zaout pa pezo amzer
Keuneud tan a pezo da derri
Ober stamm ha kempen lereier.

8

Pura ar c'hampeier ri ive
Bep sizun e ranki ribotat
Bemdez e ri d'in-me va gwele
Vit diskuiza walc'hi an dilhat.

9

Bep sul ranki mont d'an oferen bred,
Eur vech an amzer d'ar gousperou,
Ha p'errui er gear abred
E kempenni d'in-me va boutou.

10

Pezo ket butun re aliez
Rag atao peuz klevet lavaret
Eur goaz ne dlefe fumi jamez
Rag n'euz seurt falloc'h 'vit e iec'het.

11

Ar paotr yaouank respontaz kerken :
Chom a za, awalc'h am euz klevet,
Te a sonj d'id, tam libouden,
Me a zo klanv gant ar c'hoant merc'het.

12

En eur redet ez eaz ouz an ti
Hag abaoue n'eo ket bet gwelet,
N'em bije ket a boan e kredi
Vije ar paotr atao e redet.

(Reproduction interdite)

FRANCIS MOAL.